

« EMGANN KERGIDU »

Bernez Tangi

Pladenn « Eured an diaoul »

Mamm a c'hoarie « lakez du »
Gant ar speredoù klañv
Strewet ar stered tu pe du
Gant an avel d'an traoñ
Dister treut-ki ha toc'hor
Ar c'houlouenn er c'hav
Ar porzhier a rae e babor
An devezhioù ' veze mezv

Hag eo dav mont diouzhtu
Da emgann Kergidu ?

E stal levrioù ar Gwiomarc'h
'veze savet denved
Displuet-mik korf an alarc'h
Gouel ha pred ar prenved
Eil kenderv an horolajer
Ne sune 'met laezh tev
Feunteun Lolori-momeder
' strilhe chouchenn verv

Hag eo dav mont diouzhtu
Da emgann Kergidu ?

An amiegez dizalanet
' rede war-zu Kammlann
Alan al Louarn dilostet
' ribote an amann
Pesketarien ' gase en dro
O rouedoù goull
'tre an Triagozh hag an Tarv
Edo gwele ar marv

Hag eo dav mont diouzhtu
Da emgann Kergidu ?

Bugale mac'hagnet ar porzh
' voumoune o anken
Kaouadoù erc'h eus tu an norzh
A stanke ar vorlenn
Bommoù gallek 'teue ingal
Digant an abostol
Kazeg 'bet o c'hwizinkal
War traezh ruz porzh ar skol.

Hag eo dav mont diouzhtu
Da emgann Kergidu ?